



STUDI  
HAG  
OBER

NIVERENN

7

HERE 38

DASTUMADENN DRIMIZIEK



S T U D I H A G O B E R  
- - - - -

— Dastumadenn drimiziek —

R e n e r i e n : Ao. beleg Loeiz Ar Floc'h  
Institution Saint-Joseph - Lannion

Ao. beleg Per Yann Nedeleg  
Grand Séminaire de Quimper

Priz ar c'houmanant bloaz : 8 lur

Kont-red 193.17 Nantes (war ano an Ao.Nedeleg)

+++++


TAOLENN ar 7<sup>vet</sup> Niverenn  
\*\*\*\*\*

A R Z K E L T I E K

An Arz keltiek koz en Europa	p. 1 - 12
An Tisaverez koz e Breiz	p. 13 - 18
Arz Breton Nevez	p. 19 - 22
Sakramant an Aoter (evit eur brezegenn)	p. 23 - 24
Kentel verr evit an XXII <sup>vet</sup> sul goude ar Pantekost	p. 25 - 27
Notennoù	p. 27
Gwerzennoù	p. 29 - 30
Follenn-c'heriadur, a vo kavet enni ar gerioù diaes	p. 31 - 32

~~~~~

D'hon lennerien. - Dilerc'hiet eo bet an niverenn-mañ;  
emañ eben prest da veza moulet d'he zro.



# Arz Keltiek

## AN ARZ KELTIEK KOZ EN EUROPA (1)

Sonjou direiz awalc'h diwarbenn an Arz Keltiek o deus kavet bod e penn meur a hini, ha ne vo ket didalvoudek lavarout da genta n'eo ket an arz Keltiek hini an taoliou-maen, ar peulvanou hag ar c'hromlec'hioù, a zo bet savet ar pep brasa anezo gant pobladoù nevez-varevez ar maen\*, dianav o anioù.

### Amzervez an Arem.

An arz Keltiek a zo, na petra 'ta, hini ar Gelted. Met pegoulz e teuas ar re-mañ da veza eur bobl anezi hec'h-unan, n'heller ket hel lavarout diarvar. Hervez hiniennou evel Loth ha D'Arbois de Jubainville, e c'heller o diforc'ha\* a-benn amzervez an Arem (etre 2000 ha 1000 kent H.S.) e traonienn ar Roen hag en Erkunia\*. Tremenet o dije, wardro 1000 kent H.S., Gouezeled (Gaideli) da genta, ha war o lerc'h Piktet, Predeniz (Priteni, Pritenoi, Pritenes), en enezennou

(1) - Tannet eo bet al lodenn vrasa eus ar studienn-mañ diouz hini James Bouillé, "De l'Art Celtique", embannet e "Buhez Breiz", 1924, niv. 37 - 40.

gwalarn Europa, Albio (Breiz Veur) hag Iverio (Iwerzon).

Arz ar poblou-se, en oadvez an Arem, ne ziskouez ket koulskoude eur stumm disheñvel da vat diouz hini poblou ha n'int ket sur mat keltiek. N'eo an tresaduriou-se nemet ar re anavezet e pep amzer hag e pep lec'h evel tresaduriou kenta Mab-den. Doareou-kinkla eeun ez int, naturel pe dost. En abeg da se endeeun e talvez o studia hag ivez, dre m'o deus ar Gelted kendalc'het d'ober ganto en oadvez an Houarn hag en amzervez kristen, ouz o meska gant o re dibar.

En oadvez an Arem, e weler kempennet an traou dizoloet: podou, bouc'haliou, troiou-gouzoug, gant linennou kensturiek\* (Skeudenn I). Da beurgempenn an tachadennou lezet diginkl gant ar c'henlinennou\*, e reer gant gwifl\* ha kammigellou a bep seurt, kelc'hiou ha kroummellou, gwiflkarrezennou\* (Skeud. I) hag awechou an tablez (skeudenn 2). Alies awalc'h e vez leuniet gant barrennou stouet tachennad ar gwiflennou, ha sterniet an tresaduriou gant poentouigo a-linennou.

Skeudennou nevez en em ziskouez e dibenn marevez an Arem, kelc'hiou kengreizennet da skouer, hag a vo implijet kalz gant an Arz Keltiek (skeudenn 3). Dibaot c'hoaz e chom ar c'hresienn\* (sk.4), a zeuio da veza en amzervez an Houarn eul linennadur kustum meurbet. Talvoudusoc'h eo teurel evez ouz aroueziou an heol: steredennou lies-veget, hevoudou\* (sk.5), triskellou\* (sk.6), aroueziou e stumm eun S, kelc'hiou kengreizennet hag o deus holl an hevelep talvoudegez hud\*. Rak adkavout a raimp an holl aroueziou-se paot ha stañk en arz keltiek an Houarn ha betek war dorn-skridou iwerzonek eus an eizvet kantved.


Se n'eo ket c'hoaz evelato an droellenn gant he rodellou korvigellet. N'eus ket anezi en amzervez an Arem, ha seul souezusoc'h an dra-se ma kaver anezi, e dibenn marevez ar maen, lufret war beulvanou ha mein meur Armorika hag Iwerzon: Gavr-enez en Armorika, Lough-Crew ha New-Grange en Iwerzon - seul souezusoc'h ma teuio an droellenn da veza tresadur muia karet an arz Keltiek adalek amzervez an Houarn.

#### Amzervez an Houarn - betek Hon Salver


E derou amzervez an houarn (1000 - 500 kent H.S.), e weler eur marevez strafuilhet: ar Gelted o tivroa, oc'h aloubi poblou en eur gas war-raok lusk o sevenadurez. E penn kenta poblou an Hanter-noz Europa emañ hon gourdadou evit ar galloud hag an desavadurez\*; ganto ar c'henta eo bet implijet an houarn, ha dreistelez o armou a dalvezo d'ezo an trec'h war ar re all.

Skudenn 1.

Gwiflennou  
(Kelennou)





GwifKarnizennou




Skudenn 2

Tableziou




Skudenn 3.

Kelc'hiou Kengreizennet




Skud. 4

Gresenn




Skud. 5 Hevoudou



Skudenn 6

Triskellou



Gresadurioù

Orz Keltiek

An Grem

Eus o domani kenta — Kreiz Europa ha Galia ar biz<sup>x</sup> — en em strewas ar Gelted war eun dachennad ec'hon. Wardro ar seizvet kantved, e tremen ar Vrezoned (Brittones) en Enez Vreiz, a oa neuze e dalc'h Predeniz (Priteni), o deus lezet o ano gant ar vro: Pritenia, Pritania, Britania (Preden e brezoneg koz). E-pad ar c'houec'hvet kantved e c'hounez ar Gelted kornog<sup>x</sup> ha meurwent<sup>x</sup> Galia; e-pad ar pempvet kantved, kreiz ha kornog al led-enez Iberek, an Danao<sup>x</sup>uhela. E dibenn ar pempvet kantved, 400 - 390, ez aloubont hanter-noz an Itali. E-pad ar pevare en em astenont war vro Bannonia, ha d'an trede kantved e perc'hennont an Danao izela. Ac'hano e tizont ledenez ar Balkaniou (Trakia, Makedonia, Bro-Ellas) hag an Azi Vihana (Galatia).

En amzervez-se, ar Gelted o tegas d'o heul implij an houarn d'ar broiou aloubet, e kaver en Europa eun arz Keltiek gant eur stumm d'ezañ e -unan. Beza linennek eo perz kenta an arz-se, da lavarout eo al linenn a vo bepred diazez pep kinkladur. Betek e lennegez ha sonerez ar Gelted e heulier an dro-spered-se e kerz an amzeriou. Bepred e chomo gant ar micherourk kelt an tech da ijina linennek, ha setu perak e tiskouez e oberennou eur stumm diouto o-unan. Pa gemer e bed al loened hag ar bleuñ eun dra bennak da zanvez-arz, e plij d'ezañ her c'hastiza, hen difetisaat, ha tenna dioutañ eun tresadur ken dibar<sup>x</sup>a-wechou ma ne weler ket hep evez diouz petra eo deveret. Bez' en deus klasket ar C'helt kroui muioc'h eget deski, ober a-nevez e-lec'h adober, skeudenni muioc'h eget ad-skeudenni.


Studiomp bremañ spisoc'h an traezou<sup>x</sup> keltiek deuet betek ennomp eus an oadvez-se: podou (listri ar Marn, an Armorika, an enezennou breizek), klezeier, skouedou, troiou-gouzoug, troiou-brec'h, loaioù, melezourioù hag all.

Taolomp evez dreist-holl ouz oberadurioù Brezoned an enezennou, klezeier kinklet o gouhinou gant linennadurioù pinvidik-kenañ, troellennek pe balmez-heñvel. Kaera skouedou keltiek a zo eo ar skouedou arem (e-pad amzervez an hauarn, e kendalc'hoc'h d'ober gant arem evit traou 'zo, evel domp hizio). Unan eus ar skouedou-se, kaeraet gant koural, a ziskouez war e dro hag en e greiz kinkladurioù koagennet<sup>x</sup>. Kelc'hiek eo ar greizenn-se, treset warni eun houc'h-gouez, arouez meuriadou keltiek<sup>(2)</sup>. Kinklet brao meurbet eo c'hoaz eur skoued all gant hevoudou war pri-gwer ruz.


---

(2) - Biskoaz n'eo bet ar c'hog (pe ar c'hilhog) arouez ar Gelted galian pe vrezon; setu aze eur sorbienn diwanet e Bro-C'hall epad an 19<sup>vet</sup> kantved.

# Orz Keltiek an Houarn



SKeud. 7



SKeud. 8



SKeud. 9



SKeud. 10

Prigwerourien dreist e oa ar Gelted evit gwir, evel m'hen diskouez o labouriou, en o zouez laonennou-harnez en arem toullaouet ha pinvidikaet gant prigweruz, melen ha glaz: war an douar bras, d'ar c'houlz-se, n'anavezad nemet ar prigweruz. An toullaoua a blije ivez kalz d'ezo, evel ar c'hoagenni da gaout tresaduriou trouc'het naet ha kribennet lemm.

Menegomp c'hoaz, e-touez skoueriou penna an arz keltiek, ar mezeziourioù kaeraet an tu gin anezo gant kelc'hiou bras kengreizennet, enskrivet enno kelc'hiou bihanoc'h a-steudou\* (skeud. 7)

Deomp bremañ war studi al linennaduriou\* penna implijet gant an arz keltiek e-pad marevez an houarn betek H.S.

Aroueziou an heol hag al loar, hon eus roet uheloc'h o doareoù, a gendalc'h da veza graet ganto. Talvoudegez-hud\* o deus a-barz diskenn da veza hepken tresaduriou-kinkla. Met war-dro ar pempvet kantved kent H.S. e tiskouez an arz keltiek ober eun araokadenn vras pell diouz an arz koz mentoniezel\*. En em sevel a ra tamm ha tamm betek kaout stumm eun arz broadel, gant eil-stummoù disheñvel hervez ar rann-vroioù, eilstummoù anat dreistholl en enezennoù breizek.

Amprestet e vez neuze tresaduriou evel ar balmezennig (sk. 8), marteze digant ar C'hresianed goz, nemet linennekaet hag eeunaet e vezont en eun doare dibar ha keltiek rik. Dont a ra ar balmezennig da veza eur fleurenn deirdeliennek hepken, heñvel ouz eur floudilizenn (sk. 9). Kenstrollet gant an tresadur en S pe an droellenn daoudek e ro d'imp unan eus linennaduriou kareta ar c'hinkladur keltiek. War eeunaat ez aio c'hoaz an deliennou palmez betek kemer stumm daeraouennoù pe dakennou kroummet mistr. Dioutañ e-unan eo an doare-kinkla-se. N'en deus ket e bar en arz an Etrsked, pe Weneted Mor Adria, pe an Ibered. Bez' eo evit an hendraouriez\* keltiek eun arouez-diforc'h diarvar\* da verka ar ouenn hag ar marevez (sk. 10). A-wechou en em ziskouez distag a-unanou an deliou-palmez pe an daeraouennoù, a-wechou lakaet skoaz ouz skoaz, gwechou all c'hoaz kenstrollet gant linennaduriou mentoniezel: kelc'hennou, hirgarrezennou, tric'horniou, h.a... E-unan e kaver ivez ar sin S, pe c'hoaz treset tri ha tri, pe c'hoaz a-vandennoù. An driskell ivez a weler anezi riblennou hep distag (skeud. 11). Ha ne vank ket kennebeut all an hevoud, daoust d'ezañ beza kavet rouesoc'h.

Aes eo gwelout e kar dreistholl an arz keltiek kement tra a fiñv e linennoù heblegus, gwevn, ar pezh n'eo ket sounn ha diwevn. Gwell eo d'ezañ ar pezh a vroud ar faltazi hag he c'has war rack; ne lez ket ar maout da vont gant ar poell sec'h ha yen, met gant ar c'hoari. Koulskoude, mar sellomp mat ouz an



tresaduriou keltiek, e kavomp enno ivez kensoniez ha kembouez. Evit gwia, daou berz en em ziskouez enno: eeunded al linennou penna gant poell ha siqulder enno, fiñv ha faltazi mezevennus ar munudou gant barzoniez didermen. Hag eyelse denel eo an arz keltiek en eun doare dreist, dre ma 'z eo skeudenn leun an den poell ha faltazi.

Oc'h echui an enklask-mañ diwarbenn ar c'hinkladur keltiek e-pad marevez an houarn, e rankomp c'hoaz lakaat anat levezon an niver tri: triskellou, triskellou a-driadennou, deliennou palmez teirranet, h.a. Ar garantez-se ouz an niver tri a ziwan sur mat eus menoz relijiel ar Gelted koz, nemet kenderc'hel a raio gant an arz keltiek kristen.

Menegomp ivez tech ar Gelted evit al liviou flamm. Konta a ra Plutarkos e touge roue ar C'haesati lazet gant Markellus eun harnez-brezel kinklet gant aour, arc'hant, broudaduriou ha liviou flamm. Hervez Diodoros ar Sikiliad, e wiske ar C'halianed war o diouскоaz eur vantell-vezer gant tresaduriou karrezennek a bep liou. Hervez Plinius (Istor an natur, VIII, 73, 191), o dije ar C'halianed ijinet ar gwiadennou<sup>x</sup> karrezennaouet. E lennegez koz Iwerzon, n'eus ano dre holl nemet eus liviou ar gwiskamantou. Evel ma'z eo danevellet e penn-oberenn al lennegez iwerzonek koz, anvet "Skrpadeg Saout Koualnge" (Tain Bo Cualnge), kenta tra a ziskouez Ailllill ha Meva, roue ha rouanez Bro-Gonnac'ht, d'an dud a resevont en o falez, eo o dastumadeg gwiskamantou hag a zo ruz-mouk, glas, du, gwer, melen, brizellet, louet, gwenn ha du-rous, briz-du, ha roufennet lies-liou.



Fourniset e oa diabarz an tiez gant pallennoù gloan brizellet ha gant gwiadennou karrezennaouet a-stign ouz ar mogerioù.

Kenderc'hel a raio e-pad ar marevez kristen implij al livioù kann-flamm ken karet gant ar Gelted pagan; adkavout a raimp o hesoniezh er gwiskamantoù hag e kinkladur al levrioù-aviel.

### Ar Marevez Kristen

E dibenn marevez an houarn eman Impalaeriezh ar Gelted war an douar bras krog gant he diskar. Rivinet e vo, tost arak ar marevez kristen, dre aloubadegoù Kaezar. Mont da get a raio an Arz Keltiek, evit ad-sevel pemp kantved goude, e kerz argadadegoù ar Varbared. Mouget e Bro-C'hallia, e hañval an arz Keltiek beza en em viret, en eur gemma evel kement tra o padout, en hanternoz hag e reter Europa, evit addont e-touez ar pobladou o doa ijinet anezañ hag o doa e ankounac'haet.

Strewet eo bet an arz keltiek-se gant ar Varbared, zoken e broioù 'lec'h ne c'hortozer ket anezañ. Eur souez eo e adkavout en Itali, en ilizou Roma, e Milano (iliz Sant Ambrosio), er savadurioù adalek ar pempvet kantved, kinkladurioù heoliek, gweadurioù<sup>\*</sup> a-seurt gant ar re geltieka. Doun awalc'h eo bet en Itali krog ar Varbared evit skarza diouz ar vro-se ar stumm koz gresiek, poellek ha sounn, ha lakaat en e lec'h eun dro-spered nevez faltaziekoc'h. Nemet dibad e vo, peogwir hepdale e tevio d'e skarza d'e dro an arz buzantat.

Padusoc'h e chomo e Galia gant kinkladurioù an arz 'zo bet lesanvet roman, daoust n'eus ennañ netra romanek war bouez ar volz hantergelc'hiek.

E Breiz Veur avat hag en Iwerzon, ne oa ket aet da get an arz keltiek ha kenderc'hel a raio o tonet da veza kristen<sup>(3)</sup>. Kaset e vo d'e varr uhela gant menec'h an enezennou, ha dreistholl gant levginklerien Iwerzon. O tonet war an douar bras, hiniennou anezo a zesko da boblou Europa o linennadurioù eston. Ha dre an hent-se ivez e vo ensilet en arz roman levezon ar Geltiegezh. En Alamagn zoken hag e Skandinavia ec'h advleunio an arz iwerzonat, ha chomet eo beo betek en amzer vremañ en arz poblek Norvegia.

Klaskomp da genta doare ar savadurioù manet en enezennou breizek diwar an an arz keltiek kristen, evit gwelout da c'houde ar c'hinklerez anezo.

---

(3) - Sell. ouz Dom Gougaud, "Les Chrétientés Celtiques" (Paris, 1911), pennad X.

Diseven ha rust eo c'hoaz an ti-saverez e penn kenta an oadvez kristen. E danevellou kosa Iwerzon e veneger doriou, peuliu, treustou koad kizellet, speurennoù diabarz en ivin ruz gwarniset gant metal, arem, arc'hant, acour. Evelse ivez, er savadurioù kenta gant mein benet, ne weler kinkladur nemet en-dro d'ar prenestou.

Faot awalc'h en enezennoù, ha dianavez war an douar bras, ez eo ar groaz-vered pe ar groaz-hent keltiek gant eur gelc'henn-enor endro d'ar brec'hioù. Setu penaos eo bet diwanet. Gant levezon ar relijion gristen e voe engravet war ar peulvanou koz kroazioù kelc'hennet: kenstroll ar groaz kristen gant eun arouez keltiek, hini an heol. Eus ar peulvan treset ar groaz warnañ, eo deuet tamm ha tamm ar groaz keltiek unvaen. Da genta eo bet krennet beg ar maen evit heulia kroummenn ar c'helc'h a zalc'he ar brec'hioù. Distrobet eo bet ar penn muioù c'h-mui, betek lezel netra dindannañ nemet ar bedervet brec'h a gendalc'h d'ober ar fust, o chom teo bepred evelato. War eun dro e klask an teir brec'h all mont ermaez int ivez eus ar c'helc'h a serre warno betekhen; hag en diwez eo toullet ar rod-heol etre ar brec'hioù.

E Kembre e tiskouez ar c'hroazioù keltiek stumm kroazioù Malta rod-heoliet. Kinklet int war an daou du gant tresadurioù eeun ha gweadurioù, a-wechoù met di-baotoc'h gant skeudennoù tud pe loened. En Enez Vanao, ez eus kroazioù gant loened hag erevent. Re Vro-Skos a denn kalz da re Iwerzon.

Kroazioù bras Iwerzon, savet etre an <sup>X<sup>vet</sup></sup> hag an <sup>XII<sup>vet</sup></sup> kantved, a zo ar re gaera, ar re genedusa holl. En eur sichenn int plantet, karrez o fust peurlies, rannet ar brec'hioù etre tachennadoù lec'h e vez kizellet bep seurt kinkladur mentoniezel, gweadurioù, pe c'hoaz taolennou diwar ar Bibl.

E-giz savadurioù graet gant eur sonj arzel bennak, ne welomp hogos netra eus an amzer-se nemet ar c'hroazioù maen. Ha souezus eo, pa chom ganimp e-leiz a draoù kinklet e koad, e lâr, e metal, hag, en dornskridoù, tresadurioù a vil-vern o rei testeni eus buhez pinvidik an arz keltiek kristen.

Daoust pegen kaeraet e vez traou-ficherez 'zo, listri tiegez, spilhoù, kribou, h.a... n'eus ket enno peurlies pinvidigez an traoù relijiel: kroazioù-prosesion, bizier ha kammelloù eskob, kaliroù, kleier, relegouerioù, ha dreïstholl an dornskridoù. Hep chom da venegi an danvez pe ar furm anezo, pledomp hepken gant an doare-kinkla 'zo enno.

N'en deus ket klasket al livour keltiek eilskeudenni an traou diavaez, nag ober heñvel rik. Danvez kinkla a glaske enno, danvez tresadurioù linennek. Ne vour ket da daolenna dremm an den (betek dibenn ar Grenn-Amzer da vihana), ha ma

tegouez gantañ hen ober, e chomomp nec'het, ken diampart ha distumm eo an tresadur. N'en deus tennet netra eus ar plant, a welomp, en eneb, implijet kalz gant ar skoliou-kinklerez Angl-Saoz ha Gall-Saoz.

Met n'en doa ket e bar evit sevel diwar loened ar bed anevaled fãtaziek gant linennou hir, gwevn, stirenek<sup>x</sup>, evit ober gant levren<sup>x</sup>, naered, glazarded, evned gouzouget-moan ha garet-hir. Eur blijadur eo d'ezañ astenn ha treutaat o c'horfou, kreski o izili, dioukouarn, teod, lost, kribenn, evit gallout o gwea, o skoulma, o rodella. Da ijina al linennou al luzieta, ar c'horvigelleka emañ en e vleud, d'o c'hizella war vaen, da labourat war vetal, da gaeraat eul levr. Anat eo neuze perziou e ijin, struj<sup>x</sup>, faltazi, pasianted, resisted dreist, moander ha puilhder an tresaduriou war an distera tachenn. N'eus ket par d'ezañ evit ober hep distaga morse, gant hevoudou, triskellou, strollet a-driadou, pe e stumm T pe Z, ha c'hoaz gant rubanou gweet liesdoare. Iskis kenañ eo hep mar ar gweaduriou e kinklerez Iwerzoniz. Estlammet e chomer dirak milhentdall ar rubanou, al lêrennou oc'h en em zisplega didermen, kroaziet, adkroaziet, hep d'imp o c'havout morse digempenn na gwall-luziet. Bepred gant faltazi ar munudou e welomp eeunded ha sklaerded al linennou penna. Met er munudou, brasat tech da gement tra 'zo kevri-nus<sup>x</sup>, dibaot, da gement tra a c'hell soueza ar spered gant ar brec'hiou, an divesker kenweet, ar bleo, ar baro plezennet<sup>x</sup>, leoned, elerc'h<sup>x</sup>, paüned, c'houboned kroazigellet, rodellet! En arz Kelted ar Grenn-Amzer, e hini Iwerzoniz dreistholl, eo anat o hoal<sup>x</sup> hag o doug d'an traou kuz, tech ha n'eus nemeto d'e berc'henna, sach a-ouenn; poell o deus ivez, evel ar poblou all, hag ober a reont gantañ da stern-diazez o striv talarek, met eun dro-spered dibar o deus ha ne gaver ket gant ar we all, nag al Latined nag ar C'hermaned.

#### Aspadaduriou<sup>x</sup> an Arz Keltiek

Studiet hon eus dreistholl an arz keltiek kristen e Breiz Veur (Bro-Gembre, Kerne Veur) hag en Iwerzon lec'h e vleunias betek an XII<sup>vet</sup> kantved, pa varvas tamm ha tamm dindan seuliou an Daned hag an Angled-Saozon, da c'hortoz adsevel en amzer vremañ, hini an azginivelez keltiek.

Lavaret hon eus uheloc'h penaos e strewas ar venec'h iwerzonat o arz hag o sevenadurez war an douar bras 'lec'h o adkaver en arz lesanvet roman, en ilizou hag e kinkladuriou Skandinavia. Aze eo manet an tresaduriou keltiek en arz ar bobl betek hon amzer.


E Breiz, ne gaver linennaduriou keltiek enemet en eun nebeut ilizou arz roman, war tokou pe sichennou pilherou, en abati koz Sant Weltaz-Ruiz, en abati koz Landevenneg, en iliz-veur Landreger (Tour Hastings), en ilizou Loktudi, Fouenan, h.a. Pa zeu an arz Gotek, ne chom netra ken nemet, goude ar XIV<sup>vet</sup> kantved, an tech d'ober gant ar c'hinkladuriou flammheñvel, o trei hag o fiñval gwevn. Met, pa gaver ken nebeut a dra er savaduriou, daoust ha ne vefe ket chomet e Breiz eun dra bennak keltiek en arz ar bobl da vihana? Diskouezet e vez evel traou keltiek ar gwifl\*, ar c'hammigellou, ar poentaduriou implijet er brouderez pe war an arrebeuri. Evit gwir, n'int kek keltiek holl; eul lodenn vat anezo, gwifl, kammigellou, n'int nemet tresaduriou eeun ha kenta bet implijet gwechall en Europa arak ar Gelted hag a adkaver n'eus forz pelec'h dre an douar. Koulskoude an tech d'ober kalz gant gwifl, tric'horniou, linennou kensturiek, kelc'hennou kengreizennek, a zo bet miret dreistholl gant arz poblek Breiz ha Skandina-  
via, ha se a dalv ar boan da veza lavaret. Rak pep seurt tresadur, koulz lavarout, pep doare-liva a c'hell beza implijet gant meur a hini da vare pe vare, met ar pez a gendalc'h da veza implijet kalz a verk eun dro-spered hag eur stumm-arz. Keltiekoc'h eo ar c'hinkladuriou gant S, gant an troellennou, a zo bet hag a zo stank dreistholl en arrebeuri hag e broudaduriou Bro-Gerne.


Diaes eo lavarout koulskoude e teufe an tresaduriou-se implijet e Breiz end-eeun diwar re an arz keltiek koz. Diouer a ra d'imp testeniou evit gallout lavarout o dije kendalc'het betek ennomp a-rumm da-rumm. Kentoc'h e vefe bet en hon micherourien-bobl beo ha glan awalc'h spered ar ouenn evit kroui oberennou keltiek pa glaskent sevel traou kaer. Evit gwir, ne oant ket diroudennet neuze gant gwelout linennaduriou a-ziavaez bro; bez' o doa c'hoaz, da vammenn o arz, an natur hag o natur-int.

Se ne dalv ket koulskoude da lavarout e vefe splann ar spered keltiek e kement oberiadur poblek a welomp en hon mirdiou\*. Ret eo klask evit barn mat petra zo bet e gwirionez perz ha stumm gwirion an Arz keltiek.

Evidomp hizio, techet evel ma'z omp d'ober hervez ar pez a welomp a-ziavaez, n'eo ket didalvoudek studi hon herez gourdadel. Gwelout a reomp e Breiz, e-touez hon arzourien, ar stumm keltiek oc'h adveva. Eilskeudenni, hep ken, ar skoueriou koz n'eo ket avat 'pez 'zo d'ober, met klask o c'hompren evit gallout sevel diouto traou nevez, beo hag a-vremañ. Evit ober brezon, n'eus ket ezomm chom gant gweleou kloz, na loaiou koad, na gwiskamantou pounner: hon tadou koz kennebeut ne oant ket chomet gant skouedou brezel, klezeier ha tok-

houarnou hon gourdadou. Mont hervez doare-beva hon amzer a fell d'imp, hep koll evit-se spered hon arz. Rak evidomp ar Geltiegez n'eo ket eun dra varo, nag hepken kinkladur eur mirdi o tiskouez d'eun toullad gouizieien danvezioù poul-trennek da studia, ha traou evezek\* da gomz diwar o fenn; evidomp eo an arz keltiek displegadur eun ene, skrivadur eur stumm-spered a fell d'imp mirout, mammenn hon awen. Barzoniez ha pinvidigez ar munudou, sklaerder hag eeunded al linennou penna; kavout e pep danvez e dalvoudegez-kinkla; disklaeria ar pez a lavar eun dra d'ar reiz kentoc'h eget ar pez ez eo evit an daoulagad; kroui linennadurioù faltaziek hag hesonius: setu ar pez a fell d'imp mirout eus kentel beurbadus an Arz Keltiek.





# AN TISAVEREZ KOZ

## & BREIZ

Ilizou ha kestell Breiz, daoust hag o deus eur perz bennak dibar? Daoust hag ez eus eun arz brezon? <sup>(1)</sup>

Kredi a c'hellfed n'eus netra amañ ha ne vefe ket kavet e lec'h all, e Bro-C'hall pe e Bro-Saoz, o deus pouezet war hon bro al levezon anezo. E Breiz evel e lec'h all, e weler savadurioù Arz Roman, ha war o lerc'h re an arz kroummegek bleuniek pe falmmeñvel, re an Azginivelez, re an arz nevez-C'hotek. N'o deus ket ar Vretoned ijinet eun doare-sevel-tiez d'ezo o-unan; implijet o deus troiou-micher ar re all.

Evelato, gouezet o deus ar Vretoned adstumma hervez o ijin ar pezh o doa amprestet. Disklaeriet awalc'h eo bet perz-dibar hon tisaverez evit chom c'hoaz

---

(1) - Tennet eo bet al lodenn vuia eus ar studienn-mañ eus hini James Bouille "L'Art en Bretagne", prezegenn graet gantañ e bodadeg hollgeltiek Kemper, d'an 9 a viz here 1924, hag embannet e "Euhez Breiz", 1924.

nec'het en hon enklask. Nemet, o veza re hir mont gantañ marevez ha marevez, rannvro ha rann-vro, e tibunimp dre vras hepken petra zo hon stumm-ni.

Da rei d'hon ilizou ha d'hon c'hestell o dremm unanek o deus pouezet tri zra war eun dro, met en eun doare disheñvel: ar Vro, ar Ouenn, an Istor, da lavarout eo natur an darbarou\* kiniiget gant hon douar, ijin ar Bobl vrezon, mont-dont ar Politikerez.

### A r V r o

Suja a rank an tisaverez, ha striz awalc'h, da natur an danveziou roet gant ar vro: se 'zo sklaer. Ha petra gavas founnus en Armorika ar Vretoned diskenet eus Enez Vreiz? Koad ha greunvaen\*. Kilvizien dispar evel an holl Gelted, da genta e karjont ar savaduriou-koad. En amzeriou kosa ar marevez kristen, e vez sellet an ober gant koad en tisaverez evel perz an Iwerzoniz hag ar Vretoned, evel m'hen diskouez ar geriou implijet da envel seurt labouriou: "Juxta morem Hiberniae nationis" - "Opus Scotticum" - "More Scotorum" - pe "Britonum".

Mar chom bremañ e Breiz nebeut a savaduriou roman, e c'heller lakaat se war gont argadadegou an Normaned hag an diskarou c'hoarvezet e-doug an amzeriou; ha bez' e tleomp ivez merka implij ar c'hoad e renk an abegou penna.

Zoken pa zeuas ar c'hiz da vañsona gant mein, e kendalc'has ar Vretoned gant o doare koz: frammaduriou iliz dindan-wel, bolziou kinklet, treustou kizellet a weler atao, o rei testeni e oa kilviziat o flijadur hag o c'hoari bepred.

Gant ar Greunvaen e perc'hennent eun dafar\* start, padus, diwevn. Ha diwar ar perziou-se o deus gallet lakaat ivez da dalvezout, en o savaduriou-maen, ar faltazi, ar skañvder kustum en implij ar c'hoad, betek sevel eur c'hloc'hdi ken skañv ha ken sounn ha hini Kreiz-kêr Kastell-Paol. Gant ar greunvaen o deus gallet sevel balirou\*, korbelladuriou hardis seurt n'o dije ket padet gant maen-raz pe gant maen-skjent.

Muioc'h-mui o deus ar Vretoned implijet ar maen evit diavaez an ilizou, o virout ar c'hoad evit an diabarz hepken (kloc'hdiou 'zo ha porchedou a chom c'hoaz e koad). Tiez e koad a weler ivez adalek ar XV<sup>vet</sup> kantved betek ar XVII<sup>vet</sup>, stouvet ar panellou anezo gant tilh\* pe gwisket gant mein-glas; evelato ne weler implijet an ober-se nemet er c'hêriou, lec'h ne oa ket re da c'houzañv digant an avel hag ar glao; er bourc'hiou avat, er pennkêriou, merouriou, penntiou, ne gaver nemet mein, ken koulz ha war ribl ar mor, lec'h ma oa dibaotoc'h ar c'hoad ha dizalc'h dindan an temz-amzer gleborek hag holenek. N'eo ket bet diboell ar



ar Vretoned evit implij an darbarou; gouezet o deus ober hervez pinvidigez an dachenn-vro hag hervez an ezommou.

Ar glao a-builh 'héd ar goañv a c'houlenne ober toennou sounn awalc'h e-keit ma klasked izelaat ar mogerioù en abeg d'an avel greñv, dreistholl war an aodou. Ac'hano eo deuet dremm an iliz vretan puchet gant he mურიou izel, toket-ledan gant eun doenn beget-lemm. Ac'hano ar pikernioù a-sav war dourioù ar manerioù strewet en hon maezioù. Ilizou, kestell, kenson int gant ar vro.

### A r O u e n n

Evel pep tachenn eus an douar, Armorika a zo bet merket gant aloubadegoù poblou disheñvel; an hini ziweza avat, hini ar Vretoned a zouaras enni etre ar pempvet hag ar seizvet kantved, he deus roet d'ezi he stumm bremañ, dre m'eo bet galloudek awalc'h evit trec'hi war ar gouennoù galian hag all a oa betek neuze perc'henned ar vro, ha kroui eur vro nevez gant eur yez hag eun ijin d'ezi.

Disklaeriet eo bet pell 'zo penaos ne weler e Breiz eun tisaverez dibar, gant e stumm d'ezañ e-unan, nemet el lodenn-se eus ar vro ma komzer c'hoaz brezoneg enni, al lodenn m'he deus gouenn ar Vretoned trec'het da vat enni.

Mirerez ijin eur bobl eo ar yez, o veza hec'h unan gwella displegadur an ijin-se. Diwar santerez douna an dud e tiwan son ar gerioù ha tro ar frazennoù a ya da stumma spered ar rummadoù nevez. Daoust ma c'heller lavarout traoù heñvel diwarbenn kement oberenn-arz a zo, dre ma vez war eun dro diskleriadur eun dro-spered hag eur skouer evit ar re all, n'eus ket koulskoude par d'ar yez evit louc'ha<sup>n</sup> eur merk kreñv ha padus en eun ene.

E Breiz, evit gwir, an ijin brezon en tisaverez, er skulterez, er sonerez, n'eo bet padet nemet a-gevret gant ar yez: re bounner eo bet e lec'h all pouez ar galleg o sach a d'e heul eun deskadurez estren he deus mouget pe damvouget da vihana ar perzioù natur. Se a ziskouez ivez ne c'hello an arzour ober brezon da vat keit ha ma chomo ennañ ar galleg hag ar sevenadurez c'hall gant o levezon, ha studi ar yez a vo bepred evitañ ar gwella hent da adneuzia e ene. Rak n'eo ket tra-walc'h diskulia reolennoù an tisaverez breton; mar ne vev ket an arzour gant an ijin breton en e greiz, ne roio d'imp nemet savadurioù divuhez, hervez eur patrom akademiek, re sec'h ha re boellek.

Ha n'eus netra hag a vefe diaesoc'h da lakaat e reolennoù striz eget doare an arz breton peogwir ez eo trec'h ar varzoniez war ar poell a ro d'ezañ e nerz dibar, ha diaes eo plega ar varzoniez da reolennoù. Poell a zo en arz

breton, hel lavaret hon eus dija o komz diwarbenn implij an danveziou; met, war eun dro, e ren ar varzoniez ennañ da vevaat pep tra, da rei d'eun oberenn he dremm hiniennel; en hon arz, n'eo ket ar varzoniez eun dra ouspenn, war ar marc'had, mat hepken evit ar c'hinkleréz, hogen stumma an dra a-bez a dle ober. Daoust hag er vuhez n'eo ket ar varzoniez trec'h war ar poell?

Sellomp ouz hon ilizou koz: bez' int skeudenn hon spered lies-doare. Mogerious izel o deus ma hañvalont beza diazezet mat, krapet start en douar... ha dioustu e klevomp enno poell eun ene pozet mat, a oar ober e soñj abarz kemer e lañs. Nemet gant an doenn ledan, beget-lemm, torret-didorret, gant c'hoari ar prenestou e flammijenn ar bannou mein, gant an tour serz, en em zispakont en aer en eur bleuniadur a varzoniez. Na glaskomp ket re a gembouez: ezomm a zo bepred eun dra bennak da derri ar c'henventerez, eun douribell uheloc'h, eur prenest digreizennet, eun all ledanoc'h pe strisoc'h. Evel eur wezenn a vount eur skourr nevez, he devo an iliz-mañ graet he c'hresk war eun tu hepken evit rei bod da vuoc'h a dud: eun dra veo ez eo evel ar c'hevredad a zo goudoret enni. Traqu liesseurt a zo bepred gwelloc'h, bepred pinvidikoc'h. Eur blijadur e vo meska stummoù disheñvel, gwaregoù kroummegek gant kinkladur an Azginivelez: souezusoc'h a-se e vo d'al lagad.

Setu eur porched digor bras, kaeraet evit ho tegemer. N'eo ket eun nor hepken. Hervez ar poell e vefe tra-walc'h kaout eun nor eeunoc'h, ne servij da netra kaout unan ken ledan, awechou e-kichen unan all ken ledan hag hi. Evit ar varzoniez avat n'eo ket displeit: eun iliz a dle beza degemerus; graet eo evit resev gant enor pobl ar gristenien.

Barzoniez c'hoaz ar C'halvar. Ha n'eo ket eur groaz hepken, pe a vefe awalc'h, met taolenn buhez Jezuz-Krist. Barzoniez ar garnel a ziskouez ar soñj a virer eus ar re dremenet. Eur volz-enor e penn ar vered, rak n'eo ket eur park evel ar re all, ha dao e oa hen diskouez.

Nag ar c'halvar, nag ar garnel, nag ar volz-enor n'int ret evit ar poell; evit ar Vretoned evelato e oa se eun dra ret, dre ma welent en tu-hont da implij materiel o ilizou o zalvoudegez speredel.

Iliz ar Barrez n'eo ket awalc'h; evel eur wezenn he dije taolet had dre ar vro, e sav a bep tu en-dro d'ezi chapelioù en enor d'ar Sent o deus bevet aze, pe e koun eun darvoudenn a-wechall, pe c'hoaz evit rei da lec'hiou dibabet evel eur sakridigez.

Mirout soñj, displege ster doun an traou hag ar vuhez, setu petra o deus klasket hon tadou en o arz relijiel, rust ha tener, poellek ha diboull, troet

war-du an amzer dremenet evel war-du an da-zont, stag mat ouz an douar ha dedennet gant an neñv, displegadur ar Ouenn gwirion en e laesdoare.

Ha sellit ouz kastelloù Breiz evit anavezout c'hoaz enno an hevelep perziou, nerz ha galloud an traoñ, labouriou kreñv a zifennerez, hag, en eneb, faltazi al linennou krec'h, gant touriou, touribelloù, siminaliou, toennou evezek<sup>x</sup>, o sevel dic'hortoz kaer gant eur vuhez eston. Adwelit Gwitreg, pe gentoc'h Ker-Yann, evit gouzout hag-heñ n'eo ket se: starter, poellegez, war eun dro gant lusk ha barzoniez trec'h.

### Levezon an I s t o r

Ne c'hell an tisaverez bleunia da vat en eur vro nemet d'ar c'houlz ma kaver spered broadel awalc'h a-gevret gant peoc'h hag aester-beva. E Breiz e oa se dindan an Duked Yann ar V<sup>vet</sup> ha Fransez an eil, merourien ampart ar vro ha karourien an arzou. War-lerc'h ar brezel-diabarz etre Monforz ha Bleiz (hag a oa bet war eun dro eur brezel-diavaez), ne glaske ken ar Vretoned nemet en em ziwall a bep-eil ouz Bro-C'hall hag ouz Bro-Saoz, evit mirout o frankiz, ha diwar ar stourm-se e kreske enno emskiant<sup>x</sup> o broadelez. Diwallet diouz an estren, Breiz a c'helle adkavout he finvidigez gant al labour-douar hag ar c'henwerz war vor. A bep tu, ouspenn an ilizou nevez, kinklet kenañ, e welomp maneriou e-leiz o sevel da rei testeni d'imp hizio c'hoaz en doa gallet meur a hini ober e yalc'h en amzer-se.

Dre wall-eur ne dlee ket an aester-se padout pell. E-pad kantved kenta an unvaniez gant Bro-C'hall e viras ar vro al lañs roet d'ezi hag e kendalc'has an arz breton da ober berz: ne oa ket bet gwall-skoet c'hoaz na spered na pinvidigez Breiz.


Nemet gant Richelieu ha dreistholl gant Loeiz ar XIV<sup>vet</sup> a fellas d'ezañ moug personelez hon bro hag a ziskaras e-pad brezel ar paper-timbr tri c'hloc'hdi maen kizellet evit deski da Bipi Gouer chom fur, neuze e reas ar gouarnamant kreizenner e seiz gwella evit gwanaat galloud Breiz ha buhez hec'h ijin. Truajou nevez, ar reuz-beva gant ar brezelioù, kemennadurioù<sup>x</sup> ar roue da waska he c'henwerz, setu istor Breiz adalek neuze. Dinerza a reas emskiant ar ouenn da genta e-touez an noblañs, mall ganti en em c'hallekaat ha mont da Vro-C'hall da c'hounit kargou pinvidik. Hag e-touez ar vourc'hizien, hevelep tra: an henvoazioù a deuzas gant an deskadurez a vaez-bro.


E-pad an 18<sup>vet</sup> kantved, n'eo ken an ilizou nemet mañsonadur dispered, sec'h

ha diginkl. Ar gwasa holl, koulskoude, eo bet dibenn an 19<sup>vet</sup> kantved, gant savadurioù hep stumm breton ebet ken. Ilizou an 18<sup>vet</sup> a vire da vihana eun dra bennak eus an doareoù koz: ar porched bras, an doenn ledan ha lemm. Graet eo bremañ diwar patromou akademiek eun arz roman pe kroummvegek faoz hag hep ijin, hep derc'hel soñj eus ezommoù ha boazioù ar vro, ilizou uhel spontus zoken war an tornaodou, evit ma vo aesoc'h d'an avel-c'hoañv kregi enno! Labour klask a zo evit kavout unan bennak hag he dije eur stumm d'ezi hec'h unan hag eun dra barzonius bennak.

Hizio e pep bro e poanier da adsevel eun arz beo hervez ar spered broadel hag hervez ezommoù hon amzer. E Breiz evel e lec'h all, o deus stourmet arzourien yaouank evit se: ober breton hag a-vremañ war eun dro. Ober gant an danvezioù nevez-c'hounezet a laka barrek da sevel skañvoc'h ha kreñvoc'h hag o stumma diouz hon ijin koz - beza harpet war an amzer dremenet o sellout war-du an dazont: setu aze o gerioù-stur. Met gwelloc'h eget komzou, dre o labourioù o deus diskouezet eo deuet evit hon arz broadel amzer an azginivelez.

(Troet hag adstummet gant M.G.)





# ARZ BRETON NEVEZ

CHAPEL SANT - JOZEB E LANUON  
\*\*\*\*\*

Pa welomp eun oberenn-arz nevez, e klaskomp enni, hep gouzout d'imp, eun dra bennak eus ar pezh hon eus gwelet betekhen ha, war eun dro, eun dra bennak nevez. Mar bez nevez a-grenn, e vezomp diroudennet; mar bez peurheñvel ouz oberennou kosoc'h, e chomomp diseblant ha disouez. Eus al lezenn-santerez-se e c'hellomp tenna petra a dle beza reolenn-vuhez an arzou: sevel war eun dro koz ha nevez ha derc'hel soñj eus al lavarenn goz "n'a ket an natur a-lammou".

Ijina diouz hon amzer eun oberenn a-vremañ ha derc'hel gant doareou koz hon arz broadel, setu ar gudenn a zo bet diskoulmet kaer gant Strollad an Droellenn, an arzourien kristen brezon o deus savet Chapel Sant Jozeb e skol-etre Lanuon.

Petra zo a-vremañ er chapel-se?

A dra sur, implij an darbarou<sup>x</sup> nevez, ar simant houarnet a c'hell rei tolzennou<sup>x</sup> bras, unpez, ha savaduriou bloc'het divrall. E simant houarnet emañ ar pilherou, treustou ar prenestou, gwaregou ar volz, ar frammadur, an holl lodennou-labour kenstag an eil gant eben. Gant seurt danvez e c'heller diboan ledanaat an neo, he lakaat da veza karrezekoc'h evit boda an holl nepell diouz an aoter;

ezomm ebet d'ar prezeger, evit tizout e selaouerien gant e vouez, mont da vale betek eur gador ouz traon an iliz. Aes eo toulla prenester ledan, hep moger ebet kenetrezo koulz lavarout, da rei d'an diabarz eur sklerijenn builh. Evelse en deus ijinet an Aotrou Bouillé, evit derc'hel bankou ar skolidi, eur e'horf-iliz karrezet awalc'h, ha termenet gant pilherou a ziskouez en-dro d'ezo eun trepas<sup>x</sup> evit mont-dont ar vugale.

Ha setu ar santual ledan, uhelaet mat evit ma vo gwelet an aoter eus ar c'horn pella. Rak graet eo an iliz evit an ofereñn, ha setu perak e tle beza a-wel d'an holl an aoter ma kinnig warni an holl a-gevret an hevelep sakrifis d'an Aotrou Doue. Eun aoter hepken e chapel ar vugale: arabat o distrei diouz unander o aberz<sup>x</sup>. Ret eo ma 'n em santint skoaz ouz skoaz, kalon ouz kalon, stag kenetrezo en unvaniez Jezuz Krist. (Gant-se n'eo ket bet ankounac'haet ar gelennerien: aozet 'z eus bet evito eur chapel-zindan.) Eeun eo an aoter-se evel ma tle beza taol ar sakrifis a zegas soñj eus an daol santel ma lidas warni Hon Salver ar Pred diweza. Ha c'hoaz em bije karet hi eeunoc'h, hep speureñn ebet a-drek an aoter d'he sternia. Hag evit mont betek penn pella va soñj, em bije karet he gwelout troet war-du an ilizad-tud, dremm ar beleg ouz dremm an dud fidel, peogwir e vez reisoc'h an dra-se da lakaat darempred etre ar penn-lider<sup>x</sup> hag ar broferien: evelse e oa an traou gwechall e kantvedou kenta an iliz, ha nevez'zo, dre Europa, e diavaez hon bro, hon eus gwelet nevedou<sup>x</sup> aozet adarre er c'hiz-se. Evelato, kaer meurbet eo an aoter e greunvaen roz-gwer Ploumanac'h, gant linennou hesonius.

A bep-tu d'ar santual, a-us d'ar gael-gomunia<sup>x</sup>, e sav diou gadorig e greunvaen roz ar Slaerder, evit lennadenn an Abostol ha hini an Aviel. Heñvel-mik int o diou... hag an dra-mañ c'hoaz am laka eun tammig diaes, rak n'eo ket se hervez boaz an ilizou gwechall, lec'h ma oa uheloc'h, pe da vihana bravoc'h kempennet, kador an Aviel: evit selaou an abostol ne vez goulennet en em lakaat war-sav, evit an aviel e vez graet.

A-vremañ ivez eo kinkladur diabarz ar chapel nevez. Fardet eo gant eur gwiskad simant livet dre zour ha dilintr gant eun danvez a zalc'h mat, ijinet nevez'zo. Miret eo bet a-us d'an aoter eun dachenn vras da veza pentet dre eol, evel tro-dro d'an neo, ouz moger an trepas, eur gourizad evit hent-ar-Groaz.

A-vremañ c'hoaz eo al liougwer<sup>x</sup> sevenet gant an Aotrou Rault, eus Reazon. Gwir liougwer ez int, da lavarout eo gwer ha liou kendeuzet. Egiz darou

amañ an tammou gwer implijet, d'ezo eur santimetr teoder pe zaou; sklisenet int war o zro-dro evit ma tarzo warno ar goulou; stag int gant simant. N'eo ket evit taolenna eun dra bennak eo graet al liougwer da genta penn; met o c'henta labour eo rei da ziabarz eun iliz eun ton-sklerijenn hag a zougo d'ar bedenn: amañ en hon chapel e vez leun an daoulagad gant eur goulou glas-ruz dous meurbet ha bouk-burzudus.

Mar deo chapel Sant Jozeb a-vremañ e meur a zoare, stag e chom ivez ouz an henvoaziou keltiek.

N'eo ket bet klasket ficha war ar gwer eur skeudenn bennak, treset-piz; diskouez liviou kinklus a oa d'ober da genta. Marellet eo kentoc'h ar prenestou e-giz pallennoù hag a vefe treuzwelus, kaeraet gant linennaduriou eeun. Er santual eo implijet eun tresadur diwar ar barr-rezin hag an tañvouez-ed (pennou-ed) e-touez rubañsoù ha gweaduriou. En neo, eo bet meneget amzeriou ha goueliou penna ar bloavez kristen, gant skeudennou linennekaet e kreiz ar prenestou: eur vleunienn-lili evit an Azvent, eur steredenn evit Nedeleg, tri donezon ar Rouanez, kroaz ha kurunenn-spern ar Basion, kroaz skedus an adsavidigez, koulm ar Pantekost, ar gest-vara hag ar pesk da arouezia sakramant an Aoter, arc'h Noe war ar mor da verka an Iliz hag amzer ar Pantekost. N'eo ket bet ankounac'haet kenteliou hon arz tremenet, ken techet ma oa gwechall ar Gelted da linennekaat ha da gavout liviou flamm ha kinklus.

Ha bremañ gwelit taolenn vras Xavier de Langlais a-us d'an aoter, o skeudenni d'eoc'h gloar an Tiegez santel. Linennou heson ez eo anezi, a hañvalont d'eoc'h mont hep torr ebet, ken brao e klotont an eil gant eben. Tostait c'hoaz ha sellit buhez doun ar munudou, galloud ar jestroù, flamm ar pennou.

Kalz muioc'h c'hoaz e plij d'in an hent-ar-groaz. Dirouestl eo amañ ivez al linennou penna, o termena tachennadou-liou bras evit ma vo aes da lenn, kinklusoc'h. Met war eun dro, pegen fromus eo dremm ar C'hrist barrennet gant ar boan! pegen disklaerius al linennou-se troc'het, didroc'het evel taoliou skourjez war gein Hon Salver. O sellout outo n'hellan ket kas pell diouzin soñj hon C'halvariou koz, frammet sklaer an diazez anezo, leun a fiñv hag a nerz o delwennou ar c'halvariou 'lec'h n'o deus ket klasket hon tadou taolenna rik hervez gwirionez an istor, met taolenna barzonez o eneoù.

Arz breton ivez doare ar savadur, gant ar mogerioù izeloc'h eget ledander an iliz, gant ar volz-skanv dindan eun doenn lemm: stabilded an diazez, lusk ha nij al lodennou-krec'h. Merket eo gwelloc'h c'hoaz an disparti-se dre

al liviou dibabet evit pep rann; n'ouzon ket hag en deus graet se an Aotrou Bouillé a-ratoz kaer, n'eus forz. Ouz ar volz, liviou glas, glas-ruz ha melen a ro c'hoaz muioc'h a skañvder d'ar gwaregou ha d'al lambrusk. Evit an diazez avat, eo bet dibabet eur c'hendoniadur all rustoc'h, gwer ha pri-ruz, hini an douar gant ar glazur hag ar pri, hini hon buhez garo a-wechou, 'lec'h ma c'houzañvomp hon hent-ar-groaz a unvan gant Hon Salver.

Ouz traoñ ar chapel, a-us d'ar pœched eo bet aozet eur chantele evit al laz-kana hag an ograou nevez. Sklerijennet eo gant eur werenn velen hollgaer, a zo eun dudi sellout outi o vonet ermaez.

Serromp an nor ha savomp hon penn evit arvesti, a-stag e bannou ar prenest melen, eur C'hrist ouz e groaz en e veurded roueel. Moulet ha kizellet eo bet e simant a-liou gant an Aotrou Bozec. Mestr an ti ez eo an hini skeudennet aze, o ren e-kreiz peoc'h e drec'h, an hini a c'hoari evitañ liviou, linenou, tolzennou an talbenn, en o heson hag en o lusk.





S A K R A M A N T     A N     A O T E R  
\* \* \* \* \*

(Danvez evit eur brezegenn)

Brasa oberenn ar relijion gristen eo an oferenn. Hep eur sakrifis graet gant an holl hag evit an holl, n'eus relijion ebet. Hag er relijion gristen eo renket pep tra evit ma vo profet dereat an oferenn. Evit-se en deus bet ar beleg an urziou sakr: heñ eo den ar sakrifis. Evit-se eo bet savet an iliz hag en he c'hreiz an aoter. Evit-se omp bet badezet ni ivez, evit rei, en eur brofa an oferenn, meulodi d'an Aotrou. Setu end-eeun ar pezh a zo kemmañnet d'imp e gourc'hemenn Doue: "Ar suliou santel a viri".

Perak? Klaskomp hen disklaerâa, ha war eun dro e komprenimp petra eo ar gomunion; rak ar gomunion a zo ken stag ouz an oferenn ma n'heller ket kompren unan hep kompren eben.

N'eus relijion ebet hep sakrifis. Perak? Dre ma'z eo ar sakrifis ar stumm kemeret gant an den evit rei d'an Aotrou Doue enor ha meulodi. Ha perak e tleomp se d'ezañ? Nemet dre ma'z eo hon Tad: ar pezh ez omp, ar pezh hon eus a zo bet roet d'imp gantañ. Korf hag ene en deus krouet ac'hanomp; n'eus netra en hon dalc'h na vefe ket e zonezon. Gantan eo bet krouet evit hon ezommou hag hon plijadur an douar a ro d'imp bevans, hag an heol a laka ennomp levenez gant splannder e sklerijenn, hag ar stered a sked en noz. Daoust ha ne dleomp ket d'ezañ evit-se enor ha karantez ar vugale ouz o zad? Met muioc'h a zo: galvet en deus an den d'eun evurusted na oa ket dleet d'ezañ, d'eun evurusted dreistnatur e gloar ar baradoz. Ha n'eo ket eur wech hepken en deus roet d'imp ar c'hras-se, met diou wech. Eur wech d'hon tad kenta Adam, met he c'holl a reas dre e bec'hed. Eur wech c'hoaz, adroet eo bet d'imp gant Jezuz Krist, an Adam nevez ha dinamm.

Petra lavaran? Diou wech hepken? Pet gwech hon eus pec'hed, ha pet gwech eo bet pardonet d'imp! Daoust ha ne dleomp ket d'an Aotrou Doue karantez ha meulodi evit kement a vadelez? A! na chomomp ket diseblant e-pad an ofisou, evel pa n'hon dije netra da lavarout d'ezañ. Na chomomp ket mut, hep distaga ger, peogwir eo bet roet d'imp hor genou evit kana d'an Aotrou Doue. Ha seul vuic'h a dleomp kana m'hon eus bet serret hon genou, nac'het outañ ar veulodi dleet,

pec'het a-enep d'ezañ. Daoust ha ne dleomp ket d'ezañ eun dic'haou? Disentet en doa Adam; lavaret en doa, warlerc'h an diaoul: "Ne fell ket d'in kaout eur mestr us d'in". Ni ivez hon eus disentet evel Adam; lavaret hon eus gantan, da heul Satan, ne felle ket d'imp kaout eur mestr. Hag evelse hon eus nac'het an hini n'eo ket koulskoude eur mestr kriz ha garo, met eun tad largentezus, an Aotrou Doue. Disentet hon eus pa ne c'houlenne diganimp nemet ar pez a zo evit hon mad.

Peseurt dic'haou a roimp bremañ evit hon pardon, evit paea an disme-gañs graet ganimp? Distaget eo an añuar diouz an neñv gant pec'hed Adam; dis-rannet omp diouz Doue gant hon pec'hedou; argaset omp pell dioutañ. Penaos e vo adstaget ar pez a zo bet diframmet? Gant kroaz ha Sakrifis Jezuz Krist. Gwelit ar Groaz savet etre an neñv hag an douar: n'eus nemet an hent-se evit an den da vont adarre betek Doue. Gwelit ar Groaz, setu hent ar Baradoz.

Evit hon pec'hedou hag holl bec'hedou ar bed, setu an oferenn evel an dic'haou a dleomp da ginnig. Rak an oferenn eo sakrifis Jezuz Krist displeget adarre war an aoter, an hevelep hini hag a zo bet lidet gant ar Salver eur wech war ar menez Kalvar. Addiskleriet eo war an aoter, n'eo ket evit ma vefe kinniget en-dro gant Jezuz Krist. Nann; eus e berz ne vank netra d'e sakrifis, en eur wech war ar Groaz en deus peurachuet e hini. Evit piou neuze sakrifis an aoter?

Evidomp: addispleget eo e aberz war an aoter evit ma vo prifet ganimp.

Pa varvas Jezuz ouz ar Groaz, e oa evidomp, e kemere hol lec'h. Ha ni ne oamp ket aze evit kinnig d'an Aotrou Doue digoll meur hon pec'hedou, evit lavarout d'ezañ: "N'omp nemet pec'herien, ha n'eus ennomp nemet droug, met setu ho Mab a ro d'eoc'h bremañ evidomp ar garantez leun a dlefe hon c'halonou dis-kouez en ho keñver. Bremañ, Aotrou, e kemeromp soñjou ha luskou e Galon sakr da dalvezout evidomp, degemerit anezo evel ma vijemp hon re." Ar pezh n'hon eus ket graet war ar menez Kalvar, bremañ e tleomp hen ober e-pad an oferenn. Setu Jezuz war an aoter, an danvad sakr a lam pec'hedou ar bed, evit ma savimp anezañ war-du an neñv evel hon prof-ni. Hon prof-ni: da lavarout eo e tleomp ivez en em rei gantañ da Zoue an Tad, en em unani gantañ, evit ma pigno hor c'halonou gantañ war grec'h. Ra vo douget neuze hon c'hinnig betek kador veur an Aotrou Doue, ra vo degemeret gantañ, ra vezimp sellet mat gantañ.

Pegen frouezus e vo evidomp breman hon c'homunion. Digoret hon eus, gant ar prof, frank ha ledan hon c'halonou. Pignet eo hon goulenn da gavout an Tad a zo en neñv; da respont d'hon pedenn e skuilh ennomp e c'hras a-builh d'hon leunia. Profet hon eus Jezuz evel dic'haou hon pec'hedou, kinniget hon eus e garantez-dreist da dalvezout evidomp; adroet eo d'imp Jezuz dre ar gomunion, Jezuz a laka zeu d'imp breman a-berz Doue an Tad evel mammenn pep gras evit santelaat hon eneou, lakaat ennomp nerz ha reizder ha promesa e c'gloar beurbaduz.

=====

KENTEL VERR

Evit an XXII<sup>vet</sup> Sul Goude ar Pantekost

Garm an den pec'her davet Doue a zeraou oferenn ar sul-mañ: "Mar sellit, Aotrou, ouz hon pec'hedou, piou a chomo war e sav. Nemet c'houi zo trugarezus, Doue Israel. Eus strad douna an islonk em eus garmet war-du ennoc'h, Aotrou; Aotrou, klevit va fedenn". E peseurt islonk, e peseurt puñs divent e oa kouezet an den? E hini ar pec'hed. Eus stad ar c'hras, ar sklerijenn hag ar vuhez dreist-natur, eus mignoniez an Aotrou Doue e oa risklet e toull du ar boan, ar glac'har hag ar maro evit e gorf hag e ene. Pebez lamm! Ha bremañ eus an islonk e sav e vouez gant e zivrec'h astennet hag e kri davet an Aotrou Doue: "Aotrou, klevit va mouez". Peseurt mouez spontus ez eo! Klevit a-hed ar c'hantvedou klemm hir ar brofeted, selaouit goelvanou ar broiou pagan dindan samm an hudurniez hag ar fazi.

En amzer-se, a lavar d'imp hizio an Aviel, e teuas Farizianed hag Herodianed a-gevret da gavout Jezuz, ha klask e dapout berr. "Deuet omp daved-oc'h, emezo, rak gouzout a reomp ez oc'h eun den reiz hag a lavar bepred ar wirionez hepken. Petra neuze a gav d'eoc'h: daoust hag e fell d'imp paea an trujou da Gaesar pe nann? — Diskouezit d'in, a respontas Jezuz, ar pez mounreiz a vez roet evit an truj. Piou eo an hini skeudennet amañ, da biou an enskrivadenn? — Da Gaesar, emezo. — Neuze, respontas Jezuz, rentit da Gaesar ar pez a zo da Gaesar, ha da Zoue ar pez a zo da Zoue." Ha petra zo da Zoue? Pep tra. An den e-unan. Hag e fell d'an den renta da Zoue e ene, e gorf, ha kement zo d'ezañ, an neñv hag an douar. Met n'hall ket hen ober anezañ e-unan, direizet ez eo abaoe pec'hed Adam, emañ e strad an islonk, n'hall ket dont ermaez e-unan. Eur Salver a zo ezomm d'ezañ.

"Met c'houi zo trugarezus, Doue Israel, ha puilh eo ar silvidigez eus ho perz". Setu ar Salver, Jezuz Krist, Mab Doue, a zo diskennet eus an neñvou war an douar, evit adreiza ar pez a oa direnket, evit adlakaat an den da renta da Zoue ar pez a zo da Zoue, adsevel an urz diskaret ha digeri d'ar re a selaouo e vouez ti levenez Bugale Doue.

Setu perak ar bennwirionez a dleomp lakaat da ren war buhez hon c'halon, ar soñj a dleomp lakaat da c'houarn hon darempredou gant an Aotrou Doue eo hemañ: n'omp ket tennet eus ar pec'hed ganimp-ni hon-unan, n'hellomp netra hep Doue evit hon silvidigez. Pep gras a zeu dioutañ. Doue hepken eo ar Salver.

Neuze e komprenomp pedenn a-stroll (= collecta) an oferenn hizio, hag e c'hellomp lavarout gant poell: "Doue, hon repu hag hon nerz, selaouit pedenn doujus hoc'h Iliz, c'houi hag a zo hoc'h-unan oberer he doujañs, ha roit d'imp ma c'hounezimp en efed ar pez a c'houlennomp gant fiziañs". Goulenn, setu ar jestr e die beza hon hini, peogwir n'hellomp netra hon-unan evit hon silvidigez. Pedomp hag e vo roet d'imp; skoomp war an nor hag e vo digoret, hag e vezimp degemeret e ti levezeg Bugale Doue.

Taolomp eur sell bremañ war ar gentel lennet hizio; tennet eo an abostol eus lizer Sant Paol da Filipineziz: "Bezomp fiziañs, emezan, en Aotrou Jezuz Krist a gaso da benn al labour mat en deus boulc'het en hon eneo". Gantañ omp bet galvet da zegemer ar wirionez kristen, o veza bet badezet ha merket da veza eus e Iliz. Kontet omp bremañ e-touez e zerved; ha bep sul bodet omp a-gevret evit beza kelennet gant ar bastored karget d'hon diwall diouz hn enebour. "Ha pedi a ran, e gendalc'h sant Paol, ma vezoc'h unanet gant ar garantez, o kreski muioc'h-mui e skiant Doue betek pourkompren anezi, ma klaskot ar gwella, ma vezoc'h reiz ha dibec'h."

Bezomp evelse en iliz, unanet gant ar reizded hag ar garantez, hag e c'hellimp kana: "Pegen mat ha pegen bourrus eo da vrendeur chom a-gevret; dous evel an eol frondus skulhet war benn Aaron (d'e sakt), an eol a ziskennas en e varo, baro Aaron" (Gradual).

Pedomp, lavaromp d'an Aotrou Doue gant kan ar prof (= offertorium): "Dalc'hit soñj ac'hanoun, Aotrou hag a ren a-us da bep galloud; ha lakit komzou reiz em genou ma plijo va lavar dirazoc'h, va Roue."

Ha petra 'zo plijusoc'h d'ezañ eget sakrifis e Vab Jezuz Krist? Setu perak aozomp war an aoter ar bara hag ar gwin, evit ma vint sakret e korf ha gwad Hon Salver, ha goulennomp gant ar bedenn war ar profou ma vo kaset da benn ar pez hon eus kroget d'ober, ar sakrifis hag oberenn hon silvidigez: "Roit d'imp, Doue trugerezus, ma lamo ar prof salvus-mañ hon pec'hedou diouzimp ha m'hon diwallio hep ehan diouz hon enebourien."

Sur omp e teuio ar bara hag ar gwin da veza korf ha gwad Jezuz; sur omp e vo degemeret hon pedenn. Setu perak e c'hell an Iliz anzav e kan ar gommunion: "Kriet em eus ha va selaouet ac'h eus, Doue; diskenn da skouarn da glevout va c'homzou".

Jezuz, lavaret hoc'h eus dere'hel soñj ac'hanoc'h; en em roet hon eus hon-unan d'eooc'h ha d'ho Tad ha d'ar Spered Santel, hervez ho kentel:

Rentit da Zoue ar pezh a zo da Zoue". Kemeret hoc'h eus eun natur-den evit deski d'imp penaos e tle eun natur den karout ha pedi. Ho resevet hon eus, donezon kevrinus d'hon eneu, dre ar gomunion. Lakit ennomp an nerz d'ober ar pezh a c'houlennit, ha bezit muioc'h-mui ennomp skoazell hon dinerzded. (Pedenn goude komunia).

=====  
=====

NOTENNOU

Ar bont er Velin

Peurembannet eo e yez Gwened "Ar Bont er Velin", levr Loeiza Er Meliner (Itron Loeiza Herrieu), anezañ eun torkad kontadennoù bet moulet gwechall war Dihunamb. Skrivet kaer eo ar sorbiennou-se, eun dudi o lenn evit an nep a zo boazet awalc'h ouz doare-skriva Bro-Wened. Hen goulenn digant Loeiz Herrieu (St-Caradec, par Hennebont), C/C.241.28 Naoned. Priz: 30 lur war baper Kalloc'h - Mouladurioù all keroc'h war baper pinvidik.

Gant Lueez an Doueed

Daoust d'ezañ beza, evel ma lavar e-unan, eun imbourc'her hag eun naturour, barrek eo Meven Mordiern da sevel sorbiennou. Embannet en doa gwechall teir c'hevrenn-levrioù ar "Sketla Segobrani". Eun heuliad en doa skrivet evito, met ne oar ket e-unan peseurt froudenn a dremenas en e benn pa stlapas eun deiz e follennou en tan. Evit hon digoll e ro d'imp breman "Gant lueez an doueed". Evit kement hini a gar tañva blaz an hengounioù keltiek a-vesk gant hini ar faltazi hag eur stumma-skriva personel, ez eus traou bourrus e-leiz en e levr nevez.

Gwalarn - Niv. 115 - 116

S a v . Niv. 11

Eun toullad kontadennoù a zo enni evel boaz. Met gant Yeun ar Gô ez a ar maout pa zispieg d'imp en eur brezoneg c'houek troioù ha doareoù Bro-Gerne. Kement hini a anavez pobl Breiz-Izel hec'h adwelo aze skeudennet spis ha brao.

GERIOU - KROAZ

|   |   |   |   |   |   |   |   |
|---|---|---|---|---|---|---|---|
|   | 1 | 2 | 3 | 4 | 5 | 6 | 7 |
| 1 |   |   | T | V | E | S | A |
| 2 |   |   | O | A | G | E | T |
| 3 |   | O | U |   |   |   | V |
| 4 | K | A | Z |   | M |   | E |
| 5 |   |   |   | K | B | A | T |
| 6 | N | E | T | V | A |   | H |
| 7 |   | O | E | N |   |   | J |

- A-led
1. Kansonenn - Ober linennou
  2. Sonenn - Aet koz
  3. Pennrener - Kansonenn
  4. Loen distrujer - (a) zo bet
  5. Sonann - Gwez 'zo ennan
  6. Mann ebet - Sonenn
  7. Porc'hell bihan - Sonenn

- A-serz
1. Doare-karr pompadus
  2. eus ar verb beza - eus "beza" c'hoaz
  3. Troc'het e vleo - Kostezen
  4. Oberiant e oa - Klevout a reer anezan
  5. Hadet e vez - (tra) n'eo ket teo
  6. Ragano-diskoueza ; eus ar verb beza
  7. Kement a chom diwar tiez diskaret.

= + = + = + = + = + = + = + = + = + = + = + = + =

Pedet omp da embann:

Neventi vat : Deiziadur Brezonek 1939

Beteg-hen ez eus bet klasket meur a wech, met n'or ket deuet a-benn c'hoaz da lakaat moula, ingal bep bloaz, eun deiziadur brezonek. Poent eo rei d'an taol-esa nevez eun degemer seurt ma vo gellet kenderc'hel.

Deiziadur 1939 en devo daou stumm:

unan, mat da lakaat er c'hodell, a vo warnan anioiou Sent Breiz, gouelioù ar bloaz, kristen ha breizek; skeudennet gant X. de Langlais, e vo tennet war 2 liou. egile kalz brasoc'h (23 X 25), war gartons, evit staga ouz mogerioù, gant an hevelep testenn met e lizerennou brasoc'h.

Ar priz a zo: 5 real an tamm evit an hini kenta (kuit a frejou-kas)

16 real evit egile. Evit an daou, ez eus distaol dre vern.

Evit pep goulenn, skriva da: Union des Oeuvres Bretonnes, Pleyber-Christ

G w e r z e n n o u troet diwar ar Gwenedeg (1)

TRE A ZO  
-----

Me a zo eur vammenn  
a zour beo...

Tre a zo, tre a zo,  
Setu ar vein du o sevel,  
Gant bezin glas, gant bezin gell  
En dro d'ezo.

Pell emañ aet an dour.  
Divuhez, goullo eo an traez.  
Heñvel outañ va ene paour,  
Tristidigez!

Met emberr lano a vo  
Evit golei vilded ar pri,  
Nag eul levenez pa chalo  
Ar reverzi!

=====  
ALLELUIA  
-----

Que c'est beau de vivre et que  
la gloire de Dieu est immense!  
P. Claudel

A c'houde  
Goulou deiz  
Glao a ra,  
Eun nivlenn em led war bep tra.  
'Barz an dôenn an avel a son,  
Ankeniet 'vel mouez an Anaon.  
Met kreñvoc'h e kreiz va c'halon  
E sav laouen eur c'han!

---

(1) Ar gwerzennou-mañ, bet embannet dija en dastumadenn wenedek "Dihunamb", a zo kinniget da "Studi hag Ober" evit "kreñvaat an darempred etre Gwened ha K.L.T."

Eur c'han davet an Heol meur  
Na welan ket  
Hag a splann koulskoude 'vel acour  
Dreist va spered,  
A-dreuz urz kevrinus an traou,  
Ar re vat, ar re zigempenn  
Zoken,  
An avel, ar glao, ar goulou.

Ne vern an amzer dremenet  
Pa 'z eo pardonet he mez,  
Pa 'z eo debret hec'h anken.  
Ne vern an amzer da zonet,  
Pep devez a zougo e vec'h.  
Mervel ne deo nemet tremen.

Hizio

Ez oun beo.

War an aoter

Adarre

Ganet eo

Hor Salver.

Ar bed a-bez a heuilh hep hen gouzout  
Lezenn heson ar Boud!

Kan eta, va ene,

Barz ar mintin,

Da levenez

Da virviken!

Roparz Ar Mason

+++++



FOLLENN - C'HERIADUR  
-----

- A
- aberz : sacrifice
  - abostol : épître (en oferenn, dre ma vez tennet ar pennad da lenn peurliesañ eus lizerou an Abostol Sant Paol)
  - aloubadeg : invasion
  - argadadeg : attaque, invasion
  - arouez-diforc'h : critère - arouez-diforc'h diavar = critère infallible
  - aspadadur : survivance (az - padout)
  - awen : inspiration (poétique ou artistique)
  - azginivelez : renaissance
- B
- balir : saillie
  - bena : tailler (la pierre)
  - berz : prospérité - ober berz = prospérer
  - biz : nord-est
  - bolz : voûte
  - boud : être (eus ar verb bezout, bout)
- K
- kael-gomunia : grille de communion
  - kammigell : zigzag
  - kemennadur : ordonnance
  - kenlinennou : lignes parallèles
  - kenventerez : symétrie
  - kenweet : entrelacé (ken - gweet)
  - kerseet : déçu
  - kevrinus : mystérieux
  - koagenni : bosseler, repousser (du métal)
  - koaza : diminuer
  - kroummvegek : ogival
- D
- dafar : matériau
  - Danao : Danube
  - darbar : matériau
  - dazont : avenir (da-zont)
  - delwenn : statue
  - desavadurez : culture
  - dibar : original, propre (di- par)

- E  
 elerc'h : cygnes (liester "alarc'h")  
 emskiant : conscience  
 Erkunia : Hercynie  
 erevent : dragons (liester "aerouant")  
 evezek : curieux (sens passif: chose curieuse), ger implijet e Bro-Dreger  
 ha distaget "eve'ek"
- G  
 gresienn : grecque  
 gweadur : entrelacs  
 gwiadenn : tissu  
 gwifl (coll.): chevrons  
 gwiflkarvezenn : losange
- H  
 hendraouriez : archéologie (eus: hen-dra-ouriez)  
 henvoaz : ancien usage, tradition  
 hevoud : swastika, croix gammée (eus: he-bezout, bout = bien-être, en abeg  
 d'e dalvoudegez-hud)  
 hoal : attrait, séduction  
 hogos : presque  
 hud : magie - talvoudegez-hud = signification magique
- L  
 levren : lévriers (liester "levran")  
 levginkler : miniaturiste  
 linennadur : dessin linéaire  
 louc'ha : faire une empreinte
- M  
 meurwent : sud-ouest (meur-gwent = grand vent)  
 milhentdall : labyrinthe
- N  
 neo : nef  
 neved : sanctuaire  
 nevez-varevez ar maen : âge néolithique
- P  
 panellou : panneaux  
 plezennet : tressé  
 prigwer : émail
- R  
 rodheoliet : auréolé
- S  
 sklisenet : éclaté  
 steud : file, rangée  
 struj : fertilité
- T  
 traezou : objets (liester "tra")  
 tilh : torchis  
 tolzenn : masse  
 tre (trec'h) : reflux  
 trepas : galerie  
 troellenn : spirale